

GWELTAS



S^r YVES


**EUN ABARDAEZ
E
KERVARZIN**

Pez-c'hoari kentelius en eun arvest

Fade' hair

10

**Disk'aeriet ovid ar wech kenta, gant
paotred Plijidi, e « BLEUN-BRUG » Gwengamp,
d'an 11 a viz Gwengolo 1930.**



EUN ABARDAEZ E KERVARZIN

pez c'hoari kentelius en eun arvest
gant Gweltas

C'HOARIERIEN :

SANT ERWAN HELORY, tad ar beorien.

HERVE, eur barz baleer.

PANTOEDA, e bried.

EFFLAMM, e vab.

TUAL HAMON, mevel Sant Erwan.

Pemp pe c'houec'h krouadur oajet nebeutoc'h an eil eged egile hag ar bihana anezo a vezo douget gand e vamm Pantoeda.

An traou a dremen e maner Kervarzin, e kichenik Landreger, wardro ar bloaz 1300.

War al leurenn e vezo renket an arrebeuri evel ma vezent renket e kegin maneriou hor bro, breman ez eus c'houec'h kant vloaz. Eur siminal bras hag e kreiz an oaled, eur podad soubenn o virvi. Eun nor hag eur prenest a zo diouz eun tu hag eun nor da skei war ar porz, diouz an tu all. Eur gwele kloz a zo e kichen ar siminal ha, war mantell ar siminal, ez eus eur c'hrist a-us da skoued sant Erwan Helory.

EUN ABARDAEZ E KERVARZIN

TUAL, e-unan, oc'h ober tan dindan ar podad soubenn. — Aze ez eus eun tamm mat a bodad soubenn o virvi ; mat, m'hel lavar d'eoc'h, ne vezo ket pell evit beza goullonderet gand ar glaskerien vara a en em gavo aze bremaik, cvel ma en em gavont bemdez, ken niverus hag eur bagad filiped en eur ganabeg.

A ! ar re-ze a anavez eun tamm mat gwelloc'h eur ar pred eged eur an oferenn-bred. Nag a bed a welan o tont aze hag a ra sin ar groaz ker kalonek ha tra pa vezont dirak an Aotrou Erwan hag a red alese, pa vez leun o c'hof, hep kemerout amzer, zoken, da lavarout bennoz Doue d'eoc'h... Ar pez ne viro ket outo da zistrei en dervez warlerc'h.

An Aotrou Erwan a chom pelloc'h da bedi hirio, 'm eus aoun, eged en derveziou all ; eur pec'her bras bennak hag a douefen, en deus da ziframma adarre eus adre skilfou Paol Gornok, keit all ha ma pad e bedennou gantan.

S. ERWAN, ober a ra gwella ma c'hell evit kuzat ar pez a gas gantan dindan e vantell. Tual her gwel hag a vousec'hoarz). — Doue r'hor miro, Tual ! Mont a ran ermaez, eur pennadig ! ne vezin ket pell ; pa vez ar pardaez o tont, e karan mont da bedi, dre aze, en henchou doun ; pa dosta an noz ha pa guz an heol e vannou alaouret a-drenv ar mor glas, e lavarfed e tosta an Aotrou Doue ouz an douar hag e sav buanoc'h hor pedennou warzu an nenv.

TUAL goustat da genta, endra m'ema c'hoaz sant Erwan en ti, ha krenvoc'h dal m'eo aet e vestr en hent. — Evidoc'h c'houi, da vihanan, ma mestr paour, a vez atao tost a-walc'h d'an Aotrou Doue, rak beva a rit er baradoz, kentoc'h eget war an douar, ha ne jomit, dre aman, nemed evit gellout ober vad d'ar bec'herien geiz ma 'z omp.

O ! bezit dinec'h ; me a oar ervat perak e karit mont da ober eun droiad dre aze, pa dosta ar pardaez. Kement-se a rit evit mont war zikour eur paour mezus bennak.

O tiskouez mantell sant Erwan pa ya henman ermaez eus an ti.

Aze, dindan plegou ar vantell-ze ez eus adarre eur pez dilhad bennak o vont ac'han ha ne zizroio ket ken. Gweleou ?... N'eus nemed unan aman, e Kervarzin, ma hini me, rak evit henman n'eo ket eur gwele eo.

Digeri a ra an nor hag e weler dz eus eur guchennig kolo, er gwele, gand eur maen da benn-wele hag eur vallon toull di-doull. Tual a ziskouez ar vallon-man d'an dud.

Aman, er maner-man, ne chom mui nag eur pezh dilhad nag eun tamm arrebeuri ; mont a reont e flip, an eil pezh goude egile.

Arc'hant ? Ya ! tri skoued a zo em yalc'h ; ne chom nemed an dra-ze ken ganen eus ma c'houmanant hag a vez paeet d'in eun hag eun, koulskoude. Pa ne jom gwenneg ebet gantan ken, an Aotrou Erwan en deus eun doare da zellout ouzoc'h ken truezus ma ne c'hellfe ket pisa den a zo war an douar chom hep rei d'ezan ar pezh a zo gantan en e c'hodell.

Aman n'eus nemed eun dra hag a bad atao, kaer a zo chacha warnan hag eo an ed er zolier, met an dra-ze...

O ! re striz en holl eo, evelkent, an Aotrou Erwan outan e-unan ; mat eo ober pinijenn, met, arabad eo mont re hir, me-me tra !

Eskoz Roazon, eun den santel, koulskoude, a lavare an dra-ze d'ezan hag an Aotrou Erwan en deus kavet ar c'homzou-ze ken dizoare m'en deus kuitaet raktal kêr an Duk evit dont da Gervarzin. Evidoun-me a oa laouen o tont da chom dre aman. E Roazon, ez eus an hanter re a c'halleg hag an hanter re nebeud a vrezonég, elec'h aman, ne glaver nemet brezonég, bep taol, ha gand an holl : setu aze neuze hag a zo kaer !

Chom a rin gantan dalc'hmad ha ne d'c'hfen ket dioutan ha goude ma vefen goulennet da vont da lez Duk Breiz e-unan.

Tud evel an aotrou ac'han, mar d'int bet hadet stank, a zo diouanet tano. Hennez a zo mat, sellit, souc'zus eo ! mat ouz an holl ha striz en e genver e-unan hepken. Er beure-man, e beorien geiz o devoa goulonderet ar pod-houarn-se, eun tamm mat a hini, koulskoude. Pa oa aet an diweza anezo en e hent, hep lavarout na pater, na noster, na bennoz Doue, na petra 'ta, ne chome ket muioc'h a zoubenn ebarz eget ne 'z eus e palv ma dourn.

— Troc'h bara da ober da zoubenn, a lavaras d'in an Aotrou Erwan.

Ha me chom da zellout outan.

— Ya ! emezan o vousec'hoarzin, eur breizad eveldouit n'eo ket gouest da chom beo hep soubenn.

Ha me senti ; petra 'm bije graet ken ? Ar mevel a dle senti ouz e vestr. Hen a gemeras eun tamm kreun sec'h ; breizad eo ivez e-unan, koulskoude, hag eur breizad penn-kil-ha-troad zoken ! Pa 'm boa trouc'het bara, leun ma skudell, e taolis soubenn warnan ha biskoaz ne danvais hini all ebet koulz hag hounnez.

« An aelez, eme an Aotrou Erwan a vennig ar re a ra aluzen ; o zrugareka eta ! » hag e kendalc'has da chaokat e damm kreun.

M eus aoun an ailhoned o deus ankounac'haet eur ar pred hirio ; an dra-ze neuze a vefe eur burzud nevez ; met an Aotrou Erwan ne ra ket a vurzudou evelse.

Klevout a rae trouz tud o vale er porz hag eun telenn er telenni war e delenn.

TUAL. — Del ! setu aze eun toullad lamponed adarre : eur barz-baleer, gand e wreg, hag e vugale, a red eus an eil kraou hag eus an eil karti d'egile da glask kement a vezo diouz o doare, en dra ma vezo an Tad-koz o kana e zoniou.

Skei a reir war an nor ; Tual ne zigor ket. An telennour a c'hoari eun ton mat da lakaat an dud da zansal, evel an hini a gaver e trede leor Soniou Feiz ha Breiz p. 88 ; bugale ar barz baleer a gan ar c'homzou.

TUAL. — M'ho kaso alese, bremaik, ya, da gana soniou skany, evelse ! Petra ? C'houi a gemer ti an Aotrou Erwan evid eun ti da lakaat ar merc'hed da zansal ? Mar d'eo c'hoant dansal eo ho peus, it pell ac'han d'hen ober ! A ! ya ! it da glask ho « tousou » pe d'ar baradoz pe d'an ifern, met, en hanv Doue, n'it ket da zont d'o c'hask aman, da Gervarzin, ma n'ho peus ket a c'hoant da gaout eun distro lous !

Mont da gana soniou-dans aman, hag e brezonég trefoet Kerne ; ma vije bet e brezonég Treger, c'hoaz ; neuze ne lavaran ket !

Mouez PANTOEDA, ermacz. — Skwiz maro omp, koulskoude, ha du gand an naoun.

TUAL. — O ! neuze, n'eo ket henvel. Petra lavarfe ma mestr m'o lezfen da vont kuit hep tamm ! (**K ask a ra en e c'ho-dellou**). Sellit, setu aman ma skoued diweza e peziou daou wreg. Daiit. (**Digeri a ra an nor**). Gant se e c'helloc'h mont da loja da di Intañvez al Louarn ; mat a-walc'h e vezoc'h eno ha peadra ho peus aze da bae a lojeiz hag ho koan. C'hoant kemerout skouer war ma mestr am eus.

S. ERWAN (Ermacz). — Hor mestr Tual a rafe gwelloc'h eged evelse, c'hoaz. Ha n'en deus ket lavaret : Roit barr-leun ar muzul ? Ha n'en deus ket bevet ha debret gand ar re fall koulz ha gand ar re vat ? Ha ne laka ket e heol da bara warnomp holl, ni e vugale dianaoudek ? Hag ar beorien geiz-man daoust hag enebourien int kement-se d'ezan ? Deuit en ti, bugale !

(Ar barz hag e dud a deu en ti. Herve a zo an delenn gan-

tan ; gwisket fall eo hep kaout, evelato, stumm truezus eur c'hasker bara).

Deuit en ti ha, mar d'eo roget ho sae ouz drez an hent, e kavoc'h aman, en han Doue, peadra d'he fenselia. Peger seder eo daoulagad glas ar re vihan-man ! Diouz o daoulagad eo anat eo glan o c'halon !

TUAL, outan e-unan. — Eur bern ailhoned, mil gurez ! Keit ha ma vezo ma mestr-me, evel ma vez bep noz, o komz gand an aelez. Tual hag e kenn-baz a daolo evez na vefe graet gaou outan... Ar Gernevaded-ze a ranker teurel evez outo !

S. ERWAN. — Skuiz-divi e tleit beza ha muioc'h a ezomm a zo da rei boued d'eoc'h eget da rei dilhad. Tual, aozomp prim peb a vanne soubenn vat d'an dud keiz-man !

Sant Erwan ha Tual a zegas skudelladoù soubenn war an daol hag a ro e hini da bep hini. Ar vugale a stag gant mall d'o boued.

EFFLAMM. — Ar maner-man a zo eur maner paour, evit doare, mamm, met an Aotrou beleg a blij d'in.

SANT ERWAN. — Araok debri, bugale, ha ne gav ket d'eoc'h e vije mat trugarekaat an hini a ro d'eoc'h ar predman ?

HERVE. — Ya, ya ! Aotrou beleg, me a zo eur c'hernevad ha n'eus ket a ardou ganin, met kalon eur breizad a zo em c'hreiz ha ne garfen ket beza dianaoudek e kenver ar re a gavan war ma hent da ober vad d'in : Ho trugarekaat a ran evidoun hag evid ar re-man, a-greiz kalon !

S. ERWAN. — Kalon vat az peuz, anat eo, met n'eo ket d'in-me eo e tleaz lavarout trugarez, met kentoc'h d'an hini a zo dreistomp hag omp holl dleourien d'zan eus kement hon eus. Me n'oun netra nemed e zervicher didalvez. Leveromp bennoz d'ezan eta, holl a-unan.

Astenn a ra e zourn da venniga ar pezh a zo war an daol. Pantoeda a ra sin ar groaz. Efflam a glask ober eveldi, met anat eo, diouz e welout, n'eo ket gwall voaz da ober ar sin-ze c'hoaz.

TUAL, outan e-unan. — Setu aze paganed, avat, ha lavarout c'hoaz eo Bretoned ar re-ze !

S. ERWAN, da Efflam. — Mat eo, ma mab. E zikour a ra da lavarout ar c'homzou. En hano an Tad, ar Mab hag ar Spe-red-Santel. Evelse bezet graet.

(Da Herve). — Pe hano az peus ?

HERVE. — Herve.

S. ERWAN. — Eun hano kaer az peus aze hag eur zant bras eo da zant patron.

Herve, gant lorc'h. — Eur barz e oa !

S. ERWAN. — Eur barz flour, ya, hag eur zant bras. (Da Herve). Petra rcs eus da amzer ?

HERVE. — Her gwelout a rit, eur barz oun ivez. Kana a ran evid ar re vras hag ar re vihan, evid ar re baour hag ar re binvidik, evid an dristidigez hag al laouenedigez, evid ar brezel hag evid ar peoc'h, evid an eurejou hag evid ar c'hanvou. Kana a ran ar c'hanaouennou nevez hag ivez ar c'hanaouennou koz, hano enno eus tud brudet an amzer wechall.

S. ERWAN. — Ar zonerez hag ar varzonieaz, ma mab, a zo diou c'hoar, diou verc'h d'an Aotrou Doue ; eur skeud eus e c'hened war an douar-man. Karout a rez an Aotrou Doue, war a welan ?

HERVE. — Aotrou beleg, hel lavaret em eus hag hel lavaret a ran ; me ne glaskan ket beza dishenvel em diavaez diouz ar pezh ma 'z oun em diabarz.

Me a gred en Doue-ze a c'halvit Jezuz hag a veze galvet Yor gant hor barzed, en amzer goz ; met, siouaz, n'em eus ket kalz a amzer d'e bedi. Ma micher-me eo kana ha dansal, redek ar pardonioù ha gouelioù an aotrone vras. Ma doare-me da veva n'eo tamm ebet henvel ouz doare beva eur manac'h.

S. ERWAN. — Kana a rez awechou ar Zent ?

HERVE. — Ya ! Sent koz an Arvor, mignoned hor brezelourien gwechall. A ! gwechall e oa eun dudi kana sonioù ha gwerzioù Breiz :

Dioc'htu ma 'z aen 'barz ar zal
E kleved an holl o youc'hall

Dioc'htu ma kane ma zelenn,
Koueze diouz ar gwez aour melen.

Breman. n'eus nemed ar re baour hag e plijfe d'ezo hor c'hanaouennou brezonek ; ar re binvidik a zo touellet holl gant koz kanaouennou gallek ha gwella ma 'z int da netra, eo da vrei-na ar vro.

S. ERWAN. — Ya ! gwir a levere ; breina a reont ha breina a raint meur a dra.

HERVE. — C'houi, aotrou, n'oc'h ket henvel ouz ar veleien all ; ar veleien all a ra fae warnoun ha c'houi a ro digemer laouen d'in en ho ti.

S. ERWAN. — An iliz, a-holl-viskoaz, ma mab, he deus karet ar varzoniezh hag ar c'han. Hon ilizou a dregern, bep sul, gand ar c'hanaouennou kaera a oufed klevet. Ya ! laouen ouzout, rak plijout a rez d'in o veza ma 'z out paour hag o veza ma 'z out breizad. Selaou aman ganen : ha ne vez ket tenvall da benn awechou ?

HERVE. — Awechou, pa welan ma c'henvroiz o tec'hel diwar roudou o zud koz, e vennan fallgaloni, met anaoun ar re varo a vez war ma zro, pa deu an noz, hag a lavar d'in kaout fizians en amzer da zont hor Bro.

S. ERWAN. — Ha da amzer da zont da-unan, ne veze ket nec'het ganti a-wechou ?

N'ez peus ket a aoun rak an ankou ?

HERVE. — O ! an ankou am diskaro, evl Gwenc'hlan, eun deiz pe zeiz, e-tal eun dervenn, ha gwella-ze neuze, ma kar ar veleien digemerout ma c'horf paour en douar benniget ; goulenn a ran hepken ma vezo plantet eur wezenn ivin war ma bez ha staget outi ma zelenn ; pa c'houczo avel ar pardaez, e sono hag, o klevout he soniou, ma relegou o drido.

S. ERWAN, gant tristidigez. — Ha ne c'hedez eured all ebet ken ?

HERVE. — O ! gouzout a ran. hon tadou a veze hano ganto eus eur vro dudius, bro an avalou alaouret hag ar feunteunioù sêr : ar Gwenvan a raet eus ar vro-ze elec'h ma kan ar Varzed heb ehan. Kalz tud a zo bet ouz he c'hask ha, kaer o deus bet redek ar bed, n'o deus kavet netra, hini anezo, zoken Brendan, hag a zo eur Zant koulskoude, war a leverer.

S. ERWAN. — Paourkaez den ! Hag henman ? O tiskouez Efflamm.

HERVE. — Hennéz a raio eur barz ivez, evel e dad. Gouzout a ra, dindan envor, eur bern gwerziou sakr ; kerzout a raio war ma roudou.

S. ERWAN. — Eun ene glan ha daoulagad hag e par enno an nenv.

HERVE. — Tostaat a ra an noz ; al loar a zo o sevel ; mall eo d'in mont pelloc'h... Kenavo, aotrou ! Ar barz koz ne ankounac'haio biken an digemer en deus bet diganeoc'h. Me a zo eur C'hernevad ha n'ouzon ket kaout ludu da c'holo ma zan ; me a lavar an traou evel m'emaint ; mat, sellit, n'em eus ket aoun ouz hen lavarout ; n'em eus ket kavet den ebet evelloc'h-c'houi, c'hoaz, e Breiz.

TUAL. — Lavarout mat a c'hellez ! Mat ; n'eo ket ken fall ha ma sonjen, evelato, memez tra, ar c'hoz Kernevad-ze !

S. ERWAN. — Ha neuze, c'hoant ec'h eus bepred da vont kuit ?

HERVE. — Ya ! ya !

PANTOEDA. — Evidoun-me a garfe beza gellet chom aman da dremen an noz.

EFFLAMM. — Mamm, evidoun-me a garfe chom aman bepred !

HERVE. — Petra levere ?

EFFLAMM. — Lavarout a raen e c'helljemp chom aman, marteze, en noz-man, en noz-man hepken !

HERVE. — A ! Biken, avat ! gwelout a ran e karez an nevezentioù ha, dizale, ne gavi blaz ebet ken gant ma c'hanaouennou ! Mont a ri da heul beleien ar C'hrist ; dilezel a ri da dad krommet gand ar gozni, da vrezoneg ha da delenn !

EFFLAMM. — N'eus hano ebet a draou evelse. tad ! eun nozvez a dremen buan.

HERVE. — Nann ! Deomp ac'han. Deus pe chom, unan a zaou. Chomit holl, ma kirit ; ma rankan mont ac'han ma unan, ez in ma unan ; arc'hantet eo al lanneg gant sklaerder al loar ; piou a oar ? Arzur, marteze, hag e varc'heien a zizroio en noz-man ; her gwelout a rin ; am gervel a ray ; hen heulia a rin heb aoun hag hep keuz Kenavo !

EFFLAMM. — Laouen e vijen bet o chom aman.

PANTOEDA. — Petra 'rin ?

S. ERWAN. — Mont d'e heul ; kerz gantan, gwreg ; kerz gantan ; dleet eo ; skrivet eo : ar vaouez a heulio he fried hag a zilezo he zad hag he mamm, he zi hag an eienenn vadelezus. he deus kavet enni ar freskadurez e disheol ar c'hoad hag he divije c'hoantaet sevel he lochenn da chom en he c'hichen... pep tra ha koulskoude...

Sevel a ra e zaoulagad warzu an nenv hag e ped.

TUAL. — Ar penn kalet ! (Outan e-unan). Grit eur burzud en e genver, aotrou Erwan ; c'houi ne vezit ket nec'het evid ober burzudou !

Herve a gemer e delenn hag a ya etrezek an nor.

S. ERWAN. — Gortoz c'hoaz ! Ankounac'haet ez peus ober ar pez a dle ober pep barz.

HERVE. — Me !

S. ERWAN. — Ya ! gouzout a rez ervat ema ar c'hiz gand ar barz da drugarekaat an hini a ro digemer d'ezan dre eur ganaouenn.

Perak ne c'hoarifes ket eun tamm gant da delenn ?

HERVE. — Ma c'hanaouennou-me ne blijont ket nemeur.

S. ERWAN. — Fazia a rez a-grenn. Me am be plijadur atao o klevout ar barz o kana, rak an dra-ze a laka ma spered da nijal warzu an amzer dremenet.

HERVE. — Ar Varzed a oar anaout ar vad a raer d'ezo ha, pe e plijo d'eoc'h ma c'hanaouenn, pe ne blijo ket, gwelit enni eun testeni eus an anaoudegez vat am eus evidoc'h ha netra

ken. (Kana a ra Diougan Gwenc'hlan. An ton a gavoc'h p. 11 e Barzaz Breiz.)

Pa guz an heol, pa goenv ar mor,
Me oar kana war dreuz ma dor.

Pa oan yaouank, me a gane,
Pa 'z oun deut koz, me 'gan ive !

Me gan en noz, me gan en de,
Ha me keuziet, koulskoude.

Pa oan em bez yen hunet dous,
Klevis an êr 'c'hervel en noz.

.....
E êrigou hen a c'halve
Hag an holl evned eus an nenv.

Hag e lavare d'o gervel :
— Savit prim war o tiouaskell.

N'eo ket kig brein chas pe zenved,
Kig kristen renkomp da gaouet.

TUAL. — Setu aze brezoneg mat, neuze ! Perak, da vihanan, e fell d'ezan mont ac'han, pa glask ma mestr e zerc'hel.

S. ERWAN. — Brao eo ! ha da ene a-bez a drid en da ganaouenn. Eur c'han garo eo, avat ; Gwenc'hlan n'oa ket evit gouzanv ar gristenien ha den ebet ne oar perak en devoa kement-se a gas outo !

HERVE, nec'het. — Tra ! tra ! Evelse eo e kane ar Varzed en amzer hor brezelourien vras.

S. ERWAN. — Ha breman ?

HERVE. — Breman e kanont hag atao e kanint ar pez a gane o zadou.

S. ERWAN. — Hag henman, (o tiskouez Efflamm) petra 'gan ?

EFFLAMM, e-unan. — Me a gar ar c'hanaouennou kunv ha tener.

HERVE. — Kana a ray ar pezh a gan e dad.

S. ERWAN. — Ha n'etra nemed an dra-ze ?

HERVE. — Perak ? Petra c'hell beza kaeroc'h eget kan ar Varzed gwechall ? Skol a ran d'ezan ; ganen e tesk c'hoari gand an delenn ; gwelloc'h telenour egedoun e vezo ; Atsulio hel lavare d'in, o lakaat e zaouarn blank war e benn ; bennoz barz Bro Gembre a raio vad d'ezan.

S. ERWAN. — Piou a oar, Herve ? Beleien Jezuz-Krist a c'hell rei kenteliou ivez ha n'int ket anavezet marteze gant Barzed Bro-Gembre.

HERVE. — Ya ! da ! Piou a gav d'eoc'h a zo desketoc'h eget Gwenc'hlan, Marzin ha Liwarc'hen ? Ha koulskoude, n'ho peus ket a zoare da veza oc'h ober an heg ouzin ; nann, rak n'oc'h ket eur beleg henvel ouz ar re all. C'houi a gar hor c'hanaouennou ha dor ho ti a zo digor d'ar barz-baleer. O ! ma ouezit traou ha ne ouie ket ar Varzed koz, ma anavezit hent-chou ha n'int ket bet pleustret ganto, o roñt da anaout d'in, nann abalamour d'in met abalamour d'hennan, rak henman eo ma mab muia-karet.

S. ERWAN. — Ro d'in da delenn, eur pennadig.

HERVE. — Petra ? Daoust hag eur barz e vefec'h ivez ; an delenn-ze he deus teir neudenn.

S. ERWAN. — Ya ! eur benveg eo eus ar re gaera.

HERVE. — Telenna a ouezit ? N'eus ket kalz a dud hag a ouesfe diouz an delenn, dre aman.

S. ERWAN. — Gwechall, p'edon e skoliou Bro-C'hall, e c'hoari-rien a-wechou war an delenn, hag an daerou a deue em daoulagad pa en em laken da gana ganti kanaouennou kaer Breiz-Izel.

HERVE. — O ! c'houi a zo barz, anat a-walc'h eo !

S. ERWAN. — Hel lavaret am eus d'it : me a zo beleg, beleg Hor Zalver Jezuz-Krist.

HERVE. — Darn eus ar re-ze ivez a oa barzed gwechall !

SANT ERWAN. — Hag atao ez eus ; ar vistri int war ar zonnerez ha war ar c'han ; blenia 'reont ar boblou warzu ar baradoz, hag o gwella difennourien int er bed-man.

HERVE. — O selaou a ran... hag...

Sant Erwan a stag da gana kantik ar Baradoz ; lavaret e vefe eo eun ael eo a zo o kana, ker kaer e teu gantan ; d'ar c'houblad diweza, dreist-holl, e laka e holl galon da dridal en e ganaouenn :

Berr 'kavan an amzer,
Hag ar poaniou dister,
O sonjal, deiz ha noz,
E gloar ar baradoz !

Kerkent ha ma vezo,
Torret ma chadenno,
M'en em zavo en aer,
Evel eun alc'houeder.

Pa vin pell diouz an douar,
Traonienn leun a c'hlaç'h
Neuze me 'ray eur zell,
Ouz ma bro Breiz-Izel.

Neuze me 'lavaro
— Kenavo d'it, ma bro.
Kenavo, bed doanuis,
Gant da vev'hiou poanuis.

Me 'vo digemeret
E palez an Dreinded,
E kreiz an enoriou,
Hag ar meulodiou.

Me a welo Jezuz,
En eur c'hiz dudius,
O lakat war ma fenn
Ar gaera kurunenn.

An holl aeledigou,
War o eskelligou,
Ker mignon, ker ru-benn,
A nijo dreist hor penn.

A nijo dreist hor penn,
Evel eun hed gwenen
En eur parkad bleunio
Son ha c'houez vat ganto.

Eürusted hep he far,
Sonjal ennoc'h me 'gar,
C'houi a ro d'in dizoan
E poaniou ar bed-man !

Neuze eun toulladig aelez, hep beza gwelet, a gan

Erwan a Gervarzin
Er baradoz lirin,
Vo kurunet eun de,
Evid e garante !

Holl e selaouont sebezet.

TUAL. — Paol Gornok e-unan e rank beza, ma ne deu ket an Aotrou Erwan a-benn anezan, en taol-man !

Herve a chom mantret ha dilavar, eur pennad ; erfin, e stag da gomz :

Ya ! hel lavaret ho peus, ar vistri oc'h evid ar c'han ! Hor c'hanaouennou-ni a deu eus an douar ; ho re c'houi a deu eus an nenv. Evelse eo e tle kana ar Varzed e dudi ar Gwenvan a bado da viken.

S. ERWAN. — Gwir awalc'h a levere ; ar c'han-ze a deu d'eomp eus ar baradoz hag an aelez, da gredi eo, co o deus her c'hanet d'az patron, ar barz Sant Herve.

Herve o kemerout e vab gant rustoni.

Trec'h oc'h d'in ha gwella ho peus da ober eo e gemerout da ziskib. Dalc'hit hen ganeoc'h er skol ; deskit d'ezan ho kelenadurez. Petra oun-me gouest da zeski d'ezan ken ? Netra ! Absulio, barz Kembre, a wele an amzer da zont. Lavaret en devoa d'in e vijen trec'het gant ma mab. Ma gouiziegez me a zober ha ma c'hanaouennou a varv dre ma varv ar re goz endro d'n. Piou ken a c'hell o c'hompren ; ho re c'houi a vezo komprenet gwelloc'h, sur awalc'h. Ha koulskoude... pa gani o Doue... n'ez ket, gan a ri, da ankounac'haat hor gouenn... ar varzed gwechall... douar Breiz... ha da dad gwenn e vleao gand ar gonzi hag an drubuilh... Kcnavo !

Sant Erwan a glask rei e delenn d'ezan endro. Herve n'ema ket e chal d'he c'hemerout ha c'hoant en deus da vont kuit hepd. Erwan a stank an nor outan.

TUAL. — Mont ac'han ? Ober poan d'an Aotrou Erwan ha koll da ene war ar marc'had, koz Kernevad, 'zo 'c'hanout ! Ne

dalvezfes ket kalz a dra, e gwirionez, anez ma fell da'n Aotrou Erwan e gaout...

S. ERWAN. — Chom aman, sell, pa lavaran d'it ; ar paotrig-se en deus ezomm ac'hanomp hon daou. Me 'gomzo d'ezan eus a Zoue, te 'gomzo d'ezan eus a Vreiz ha pa vezo an diou garantez-ze en e galon ; pa vezo, war eun dro, barz ha beleg, ez aio dre ar vro, e komzo d'ar bobl, e prezego d'an holl hag e fuilho e kalon kement hini her c'hlevo an diou garantez a leun hor c'halonou-ni : ar garantez evit Doue hag ar garantez evit Breiz : Doue ha Breiz, eno eo ema an dalc'h !

HERVE. — Me a zo koz... tostaat a ran ouz ma zremenvan... Koulskoude, ma c'hellan plijout d'ho Toue, — e varadoz a zo ker kaer ha ker brao e kaner ennan, — e c'hellfen chom en ho kichen hag e kanfen, marteze, war ma zelenn, toniou hag a vefe gouest da lakaat ar c'halonou da bignat etrezek an nenv.

Sant Erwan a ro d'ezan e delenn ; kroummet warni, e sell outi gant preder.

TUAL. — Me a ouie a-walc'h en divije ma mestr graet eur burzud all ; al louarn koz, koulskoude, a zo bet tenn da dapout, met deuet eo an Aotrou a-benn eus e daol, ha breman, epad nozveziou hir ar goanv, e tregerno an ti gand ar c'hanaouennou brezonek.

HERVE, o tont eus e zizouezenn. — Ha red e vezo d'in dilezel kredennou ma zud koz ha nac'h o c'helennadurez ?

S. ERWAN. — Tamm ebet ! selaou, ma mab. Pa 'zav an heol, an holl a gav kaer e vannou skedus. Kaer eo ivez al loar hag he bannou arc'hantet evid an den a gerz epad an noz. Daoust ha stlepel a ray warni e yalloz pa deuio ar goulou-deiz da skedi a-us d'e dal ?

Nann, n'eo ket gwir ? Hep kaout keuz d'ezi, he c'hano, koulskoude. Mat, gra ivez evelse ; betek hen, ez peus kerzet en noz, ouz sklaerijenn denval al loar ; hirio sklaerder an heol a bar dirak da zaoulagad ; kerz eta da heul ar sklaerder-ze ha kendalc'h da gana ha da veuli rouanez an noz. Hi eo he deus hentchet da gammejou warzu an heol, roue bras an deiz ; mar d'eo dishenvel sklaerder an heol diouz sklaerder al loar, arabad eo kredi e teufent eus diou eienn dishenvel ; eus an hevelep hini e teuont hag eo kalon zakr Hor Zalver Jezuz-Krist.

HERVE. — Aotrou, diweza barz a zo e Breiz-Izel a zo deuet da veza ho tiskib adalek hirio.

S. ERWAN. — N'out ket an diweza barz ! Keit ha ma wal-c'ho ar mor aochou Breiz ha keit ha ma sklaeraio an heol koajou doun an Argoad, e vezo kavet barzed da gana, e yez hon tadou, sent ha brezelourien an Arvor. Met, deuet eo an abar-daez ; an eol a guz e vannou ; ar gwez a gloz o deliou ; al laboused a zo paouezet da gana ; pep tra a sioula ; deuet eo an noz ; mall eo d'eoc'h diskwiza hoc'h izili brevet gand ar bale ; koulskoude, a-raok en em rei da gousket, arabad eo d'eomp chom hep trugarekaat an Aotrou Doue en deus roet d'eomp, hirio adarre, kement all a c'hrasou, ha ra vezo hor c'houk, e-unan, eur bedenn.

Sevel a ra e zaoulagad warzu an nev hag e ra eur bedenn aspered hag ec'h en em denn, en e gampr, goude beza roet e vennoz d'an holl.

Doue r'ho pennigo, ma bugale !

Holl e stouont^e ; **HERVE**, dre anaoudegez vat, a gemer e delenn hag a gan :

Eur wech c'hoaz, trid etre ma daouarn, telenn ma zadou, da gana an den hep par en deus digoret d'in hent ar Gwenvan gwirion, hent baradoz Jezuz ha c'houi, Bretoned, unanit holl ho mouez gant ma hini da gana, a-bouez penn, gwella mab a zo bet ganet biskoaz war douar hon Arvor : an Aotrou Erwan Helory, eus a Gervarzin.

Kana a ra diskan kantik Sant Erwan hag an holl selaouerien a ziskan outan :

Nan eus ket e Breiz, nan eus ket unan
Nan eus ket eur Zant evel Sant Erwan !

Ar gouel a ziskenn goustadik.

Vauruellan, 19 a viz Mae 1909.

Plougerne, 3 a viz Eost 1930.

GWELTAS.



125

